

Kanaouennou pobl

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Gouzoud a ree skrivagnerien ar hanaouennou-ze gwelloc'h ar galleg, o-doa studiet er skol, eged ar brezoneg n'anavezent nemed hervez an doare ma veze komzet en o farrez. Alese eur bern gerioù galleg 'barz o skridoù.

Taolenn

Ar plah yaouank en em veuz

Ar plah yaouank en em veuz (doare all)

Maro an intañvez lavaret gand ar hleier d'he mab a zo pell-tre.

Ar wezenn varzuz.

Koñversion Mari-Madalen.

Ar plah yaouank en em veuz

A deiz kenta deuz a viz Du,
Pa ziskenn ar Zaozon en Dourdu

Eur plah yaouank o-deus laeret,
Ar Varivonig 'zo anvet.

O-deus laeret eur plah yaouank
Da gas gante d'o batimant.

Ar Varivonig a ouele,
Ne gave den he honsolje.

Ne gave den he honsolje,
'Med ar Saoz braz, hennez a ree.

Hennez a lare dei bepred :
« Tevet, plahig, na ouelit ket.

'Vid ho puhez ne gollfet ket,
'Vid hoh enor, ne laran ket ! »

« Aotrou ar Saoz, din leveret,
De bet' amañ 'vin oblijet ? »

« Din va-unan, d'am faotr a gambr,
D'am martoloded p'eo-devo c'hoant.

D'am martoloded p'eo-devo c'hoant ;
A zo ane unan ha kant ! »

Ar Varivonig a lare
Enni he-unan, eno neuze :

« Itron Varia hag an Drinded !
Pe 'n em veuzin, pe ne rin ket ?

Sellit ouzin, gwerhez Vari,
Ne houlan ket hoh ofañsi ! »

Deuz he Doue he-deus sentet
War he fenn er mor eo 'n em daolet.

Kriz 'vije 'r galon na ouelje
Antronoz en treiz neb a vije,

Nag o weled oll dud ar vro
Bodennet en-dro d'ar horv maro,

Ar plah yaouank en eur harroñs,
O vond d'interi d'he farroz.

Kanaoeunn Bro-Dreger, bet dastumet e 1855 gand M. Lejean

Eil doare

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

D'an daou warn-ugent a viz Du
'Tiskenne ar Zaozon e Dourdu. (*diou wech*).

En Dourdu pa'z int diskennet
Eur plahig koant o-deus laeret. (*diou wech*).

O-deus laeret eur plah yaouank
Da gas ganto d'o batimant. (*diou wech*).

Ar plahig-mañ, hi a ouele,
Ar vartoloded a hoarze. (*diou wech*).

« Tavit, plahig, na ouelit let,
Evid ho puhez ne gollot ket ; (*diou wech*).

Evid ho puhez ne gollot ket,
Mez hoh enor deoh ne lavaran ket. » (*diou wech*).

« Gwelloh eo ganin mervel mil gwech
Evid koll va enor eur wech ; (*diou wech*).

Rag an enor eur wech kollet,
E gaoud da brenañ ne haller ket. (*diou wech*).

Aotrou "Anglais", mar dan ganeoh,
E-biou ti va zad n'em hasit ket. » (*diou wech*).

« E-biou ti ho tad e viot kaset,
Paneve gand aon da veza gwelet. »

Pa edo o vond gand an hent braz,
He zad hag he mamm a rankontras. (*diou wech*).

« Boñjour, va mamm, boñjour, va zad,
Ne weloh mui va daoulagad. (*diou wech*).

Adieu, kerent ha mignoned,

Adieu breudeur ha c'hoarezed. (*diou wech*).

Da vestr al lestr eo 'n em rekomandet.

Da vestr al lestr, d'an den a vor,
Ha d'ar hontremestr d'he sikour. (*diou wech*).

« Deboñjour deoh ha da dud ho kambr
Ha da gement 'zo en ho patimant. (*diou wech*).

Da gement 'zo en ho patimant,
Ar pezh a ouzon ez eus en enni tri-hant. » (*diou wech*).

Digand mestr al lestr he-deus goulennet
Mond war ar pont braz da bourmen. (*diou wech*).

War ar pont braz pa edo o voned
War he fenn er mor e' n em daolet. (*diou wech*).

War he fenn er mor 'h 'n em daolet,
Daou beskiñ bihan 'deus he saveteet. (*diou wech*).

Beb a groaz arhant en o herhenn
A zavas Marivonig¹ d'ar gourlenn. (*diou wech*).

Pa'z a an avel 'bazz e nord,
'Tegas Marivonig d'ar bord ; (*diou wech*).

Pa'z a an avel 'barz an traoñ,
'Tegas Marivonig da Ger-a-draoñ ; (*diou wech*).

Pa'z a an avel 'barz 'n e viz²
'Tegas Marivonig d'an iliz. (*diou wech*).

Er gêr pa'z eo erruet
He zad hag he mamm de³ 'deveus gwelet. (*diou wech*).

« Boñjour, va mamm, boñjour, va zad,
Setu-me erruet er gêr. (*diou wech*).

Setu-me er gêr erruet,
Va enor ganin n'eo ket kollet. (*diou wech*).

Va enor ganon n'eo ket kollet,
En despet d'ar vartoloded ! » (*diou wech*).

Bet dastumet e Lezneven, e 1886.

¹ A zavas Marivonig : daou beskiñ a zavas...

² an avel 'barz 'n e viz : e tu ar biz. Gwregel eo "avel" er skrid orin, alese "hi biz".

³ de : deze (= aneze).

Maro an intañvez lavaret gand ar hleier d'he mab a zo pell-tre.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Didostait oll dud yaouank, didostit da gleved
Eur werz spirituel a rey deoh da entent
'Zo greet d'eun intañvez demeurez a Vreiz-Izel
O kimiadi diouz he mab partiet d'ar brezel.

Kement a gleo ar werz-mañ, na rey refleksion,
A zo kreñvoh evid eun tigr, kreñvoh eged eul leon.
Hogen a zo eüruz, hogen a zo eun tirant
An hini 'n-eus laket er maro or zalver benniget.

N'ez eus tamm "humilité" e-touez ar gristenien,
Ma'z eont da weled raktal, en eur, deuz eur breuvenn
Komzet euz eur fumelenn⁴ deuz a eskopti Dol
A zo manet intañvez ; he ano 'zo Nabol.

Pevar deuz a vugale a jom gand ar wreg-se ;
N'eo ket pemp ploaz echu ar hosa euz ane.
He bugel lañgisant a ya prest gand Doue.
Hi a jom paralizi kerkent war he gwele.

He mab henañ a lavar : « Me 'ya da zerviji,
Ar pezh a houezin 'vezo 'vid ho soulaji. »
En em daolet e oa d'ar hloar ha d'ar vanite ;
'Oa ket a zoñj euz e vamm gêz war he gwele chomet.

Ma oe deuet en e oad da dennañ d'ar billed⁵,

⁴ Komzet euz eur fumelenn : Hervez eur vaouez

⁵ da dennañ d'ar billed : d'ober e goñje e-barz an arme.

'Tre ma'z oa mab intañvez e oa bet egzantet.
Eur bloaz war-lerh Loran e-neus bet tennet ;
'Vid komplisa ar hlahar, ha nemeur 'oa izel⁶.

Retorn a ra d'ar gêr, e galon 'oa mantret ;
Pa erru 'kichenn e vamm kalz daelou 'n-doa skuillet.
« Va mamm baour, emezañ, petra reoh-hu bremañ ?
Me am-eus eur billed du hag a rank partiañ. »

Lavared 'ra d'e vamm : « Da gaoud va breur me a ya
Evdi e bedi eur wech c'hoaz a-raog partial
Da rei eun dra bennag eur wechig gand an amzer
D'ho soulaji, va mamm baour, e-barz en ho mizer. »

Pa erru 'kichenn e vreur, e lavaras dezañ :
« Me am-eus eur billed du hag a rank partial ;
Ez on deut d'az pedi da rei eun dra bennag eur wechig gand 'n amzer
Da zoulaji or mamm baour e-barz en he mizer. »

E vreur a respont dezañ : « Na deu ket war va zro,
Da gorrampi a rafen gand da finesaou ;
Kentoh evdi da gredi me 'houleñn beza raktal
Rentet amañ war ar plas bouzar ha mud ha dall. »

Retorn a ra d'ar gêr, e galon 'zo mantret ;
Pa erru 'kichenn e vamm kalz daelou 'n-eus skuillet.
« Va mamm baour, emezañ, petra 'rafeh-hu bremañ ?
Va breur ar mizerapla a zo e-barz ar vro-mañ.

Kentoh evdi va hredi en-deveus goulennet
Beza rentet war ar plas bouzar ha mud ha dall. »
« Gouzoud a rez, va bugel, Doue a zo eun tad mad,
A bardon ar peher a-greiz e galon vad. »

Pa edo d'ar vamm dezolet ar bugel adarre o prezeg,
Eur jañdarm e-barz an ti ivez 'zo bet antreet
'Vid rei da Loran e veultrin da bartial raktal ;
Hemañ 'oa evid o-daou an diweza glahar.

Lavared a ra d'e vamm : « Me 'ya da glask sikour
Deoh en amezegez, prizet euz va homzou,
Prizet euz va hleved :
C'hwi 'vo va mamm baour ha me, abandonet.

« Parti 'ta, va bugel, parti 'ta d'ar brezel,
Leusk ahanon e gloar⁷Doue : red eo deom mervel. »
Serra 'reas an nor war e vamm langisant ha kas gantañ an alhwez ;
« Lak hañ war eur horn deuz an aoter, her havi goude-ze. »

⁶ ha nemeur 'oa izel : izel e oa e numero. (neuze e oa fall e numero).

⁷ gloar : e *gwar*, a vefe bet gwelloc'h, hervez an dastumader ;

Pa edo en e rejimant oh entent euz e loen
E lavar d'e gabiten : « Va mamm baour 'zo maro :
Me 'gleo patant ar hleier o seni d'he glazou. »

Lavared a ra e gabiten : Eur mirakl braz e ve
'Klefes-te da vro hanter-kant leo ane⁸. »
Lavared 'ra d'e gabiten : « Kemerit eun tamm fer⁹
Hag e klevet anezo o seni koulz ha me. »

Lavared a ra e gabiten : "Me o hleo koulz ha te :
Bremaig-souden, va bugel, me 'ya da rei dit da goñje
Ma'z i d'ar gêr da weled intered da vamm gêz
Kar gouzoud a ran da galon 'zo en tristidigez.

P'en-deveus bet e goñje e vale noz ha de',
Ma oa rentet er gêr, ne oa ket pell daleet.
Rag ma erru er gêr en em staol war e zaoulin
Da drugerakaad Doue deuz e hrasou divin.

Rag ma echu e bedenn, e kemer an alhwez ;
Rag ma tigor an nor e sell deuz ar gwele.
E kavas e vamm baour maro,, warni 'n em daolas,
Gand ar hlahar en-deus, e galon a rannas.

Setu eno skwer ha poltred ar vugale vad
Ar re 'zo bet en andred o mamm dener, o zad.

Bet dastumet e Lezneven e miz Here 1886.

⁸ ane : aneze.

⁹ fer : houarn.

Ar wezenn varzuz

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Dañsom 'ta, gwiolañs¹⁰,
Eme ar zonerien (*diou wech*)
Red e vezo formi eur jañson war zujed eur wezenn.

Ar wezenn-mañ 'zo savet war bordig eur rivier
En eur barrezig vihan demdost a Landreger.

Ar wezenn-mañ 'zo plantet war bord an abati ;
Me 'gred eur rosignol yaouank a gomand warnezi.

Ar wezenn-mañ 'zo branket partoud dre ar hoajou,
Glaz eo 'vel eur rezinenn¹¹, karget a avalou.

Eur vandenn lapoused 'tizrei diouz an draonienn, 'tizrei diouz ar hoajou,
Me a gred ez int repozet serten war he brankou.

Eur vandenn chaseourien 'tizrei diouz a Naoned,
Unan euz ar pichoned o-deus bet tizet.

Touch deuz deliou ar wezenn 'zo eur pehed veniel,
Debr euz he avalou 'zo eur pehed marvel.

Ar jañson 'zo kompozet serten war eun ton trist :
Maro eo mamm an avalou 'n or-bouezo mui a jistr.

¹⁰ gwiolañs :violoñsou.

¹¹ rezinenn : eur winienn.

Konversion Mari-Madalen

War ton Gwerz ar Ganaeenn

Martha

Madalen, savit euz ho kwele,
Da vond d'ar bredikasion :
Jezuz a zarmon hirie adarre,
Klevit eñ gand atansion.
Bez' en-deus eur sekred eksellant
Da douch kalon ar beherien,
Pa vent ker kaled ha diamant,
O rento tomm demeuz a yen.

En em habillit gand dilijañs,
Gand aon na veh re ziwevad ;
Totait outañ gand koñfiañs,
Ha pouezit e gomzou ervad.
Esper am-eus e viot touchet
Gand ma finisao ar sermon,
Peotramant eo red lavared
Ez eo kaledet ho kalon.

Madalen

Va hoar Martha, me 'yel' d'e weled
Ha d'e gleved en e zerman,
Evid ma kontantin ho spered,
Ha nompas gand devosion.
Me am-bezo ar guriozite
Da lakaad evez piz outañ,
Evid gelloud, goude kement-se,
Rei eur gwir rapor dioutañ.

Jezuz

Eur pastor mad a goll eun dañvad,
En-deveus eur heuz braz dezi¹²,
Hag a abandon ar vandennad
Evid mond da glask anezi.
Me 'wel unan 'zo bet dianket,
Hag am-eus eur joa vraz outi :
Hag he lakaad e-touez va deñved,
Euz a leh ne zianko mui.

Ene superb, kalon revoltet,
Evidout e teaun da zerman ;
Me am-eus da weled o toned,
C'hoant am-eus da douch da galon ;
Digor an nor d'ar Spered-Santel,

¹² dezi : dezañ (eun dañvadez an hini eo ?)

Hag en em abandon dezañ,
Ne zisklêrii pelloh ar brezel
D'ar grasou ah-eus digantañ.

Madalen

Jezuz, va Mestr ha va gwir Aotrou,
Va halon hoh-eus gounezet ;
Me 'rey uzaj vad euz ho krasou
Pelloh endra 'vezin er bed.
Me 'ya da guitaad va ornamañchou,
Va halon a zantan mantret.
Adieu d'an oll gompagnuneziou
Ha da gement am-eus karet.

Martha

Petar eo eta, va hoar Mari ?
Hennez 'zo eur cheñchamant pront !
Perag e teut d'en em dezoli ?
Ha den en-deus greet deoh afront ?
Foula 'rit, evel pa veh follet,
Hoh oll ornamañchou kaerra,
Ha pa vezint ganeoh kollet,
E rankot adarre prena.

Madalen

Va hoar Martha, va list da ober,
Jezuz en-desu va gounezet,
En-deus va laket en koler
Ouz ar pezh 'zo kaoz d'am pehed.
Me ne brenin mui jamez biken
Dillad euz a eur priz ker braz ;
Me 'zougo bremañ friz ha lien,
Ha nompas satin na damas.

Ar horv-mañ, an hini¹³ 'zo bet ornet
Gand dillajou kaer ha traou all,
Ne vezo mui pelloh goloet
Nemed gand ar hoz dillad fall.
An douster en-deveus bet santet
O tougen voulouz ha satin
A vezo evid biken cheñchet
E-barz en taoliou disiplin.

Marha

Ha posubl 've, c'hoar Madalen,
E-pe bet eur seurt donezon ;
Eur joa vraz am-bezo da viken
Da beza galvet d'ar sermon.
Kee, red buan da vanked Simon,

¹³ an hini : pini, er skrid orin.

Ha lez an dud da lavared ;
Gra ofr da Jezuz euz da galon
Dirag ar Pharizianed.

Madalen

Lavaret pep hini a garo,
Me ne ran forz euz an dra-ze ;
Jezuz am har ha me her haro,
Mestr eo din ha d'am bolonte' .
Me 'walho e dreid gand va daelou ;
A-zirag Simon hag e dud,
Hag a ray goap euz o sañsurou,
Heb mez nag aon rag o gwall vrud.

Va daoulagad, roet oh euz daelou
Da walhi treid va medesin,
Ha c'hwi, va halon, huanadou,
Petra bennag ma ven iñdign.
Va memor, ho-pet soñj anezañ
E pep hent heg e peb momed ;
Va bolontez, tommit dioutañ,
Na skuizit ket ouz e gared.

Ar Pharizian

Ma ve an den-mañ eur gwir brofet,
E-giz ma lavar sur ez eo,
Ne lezfe ket eur plah debordet
Da zehi e dreid gand he bleo,
Na ne lezfe ket tostaad outañ,
Ne rafe ket stad anezi ;
Mez doned a rafe d'he hanna,
Ha d'he chaseal euz an ti.

N'he-deus ouz e dreid frotet oñgant
Nemed gand design d'e lakaad
D'he hared ha da veza kontant,
D'ober anezi bepred stad ;
Hag eviti da skuilla daelou,
Daelou trompluz eo ar re-ze,
A hellfe servijoud da lasou
Da drompla an neb na zoñjfe.

Jezuz

Simon, n'navezan mui war wreg-mañ ;
Ne deo mui evel ma'z eo bet ;
Eur galon bur he-deveus bremañ,
Renoñset he-deveus d'ar bed.
Deski a ra d'an oll o dever,
Ha memez dit-te da genta :
Kemer hi evid eur milouer,

Deus da ober ar memez tra.

Ne zoñj ket dit e ve kriminel
Ar garantez he-deus ouzin ;
Komzet e vezo em Aviel
Euz a gemenent a vad a ra din ;
He hrimou 'zo dezi pardonet
Abalamour d'he harantez,
Hag abalamour ma'z eo fachtet
Da veza greet fallagriez.

Kee, gwreg, en peoh, en pasianted,
Da feiz he-deus da hreet salo ;
Pardonet 'z eus dit meur a behed,
Bez fidel beteg ar maro.
Publi, en despèt d'ar Judevien,
Penaos eh-eus kavet moaienn
Da veza dit da grim pardonet
Gand Doue, ar Mestr souveren.

Madalen

A ! permetit d'ho servijerez
Da chom bepred en ho prezañs
Rag aon na ve ker maleurusez
D'hoh ofañsi dre iñkoñstañs :
Nag 'vid ma ouezo ar Judevien
N'en deus kaoz da goñversion
Euz ar beherez vraz Madalen
Nemed ho koñversasion.

Martha

Aotrou, n'on-eus biskoaz meritet
D'ho reseo e-barz on ti,
Rag se n'oun ket e prizet
Dond da renta bizit deom-ni.
Komañset eo bet ar Judevien
Da parlant ha da vurmuri
Abalamour d'am hoar Madalen
Dre m'hoh-eus istim eviti.

Jezuz

Hervez o gwall iñklinasion
E teu 'r Judevien da juji
Ha dre eur spered 'ambision
E fell dezo va sañsuri.
Ha ne ouzont ket ar medesin
A lez an dud o-deus yhed
Evid rei d'ar re a zo iñfirm
Soulajamant en o hleñved.

Euz a ene Mari-Madalen
Me 'm-eus chaset seiz kleñved,
Heb n'oar nikun euz ar Judevien
Pe feson em-eus int kaset.
Ennon e lakas he honfiañs,
Ar pezh 'zo kaoz euz he yehed ;
Ma ne vez er medesin fiziañs,
Ez eo diêz-braz kaoud remed.

Madalen

Aotrou, p'hoh-eus bet ar vadelez
Da zoned d'on ti d'or gweled,
Ez eo just deom-ni ar joa diskwezh
On-eus ouz ho tegemeret ;
Mez grit d'am hoar Mari labourad,
Ne ra nemed ho kontampli.
Livirit dezi n'en deo ket mad
Chom bepred da feneanti.

Jezuz

Lest Madalen bepred em prezañs ;
Beza 'm-eus outi karantez ;
Me 'estim e repoz, e silañs,
Kalz mui eged ar pezh a rez ;
Hi he-deveus greet ar choaz gwella,
Ha den n'hel lamo diganti :
N'eus nemed eun afer er bed-mañ
Neseser da efektui.

Madalen

Va Doue, va Mestr, va harantez,
Penaos eta 'rin-me bremañ ?
Grit ma varvin ganeoh assemblez,
Ha va zennit euz ar bed-mañ.
Pa ho kwelan er groaz o souffri,
N'hellan ket mired da ouela,
Ha p'ho kwelan en hoh añgoni
E teu va halon da ranna.

Jezuz

En em goñsol, gwreg karantezuz,
Me 'zalho dit fidelite,
Ne vezo ket kollet dit, Jezuz,
Dond a ray da gaoud adarre.
Dastum piz ar gwad am-eus skuillet
War an douar e-bazr ar groaz,
Ha deus bepred atao d'am hared,
Da rekompañs a vezo braz.

Madalen

Maro eo Jezuz ! petra 'rin-me ?
Bourrevien, c'hwi a zo kruel !
Da vihanna, va lazit ive',
Dous e' din gand Jezuz mervel.
Va daoulagad, deut da rei daelou,
Va halon, deut d'en em ranna,
Ha grit kement demeuz a gañvou
Ma'z in souden euz ar bed-ma'.

Adieu d'an oll laouenedigez,`
Pa'z eo maro Jezuz bremañ,
Ne welan nemed tristidigez ;
Ez eer da vond d'e liena :
Deom eta, o ! va hoarezed,
Gand e Vamm d'an interamant ;
N'en deo ket just e ve dilezet
Pa he-deus brasa nehamant.

Euz ar zizun an devez kenta
Ez im mintin david Jezuz,
Evid ma hellim lakaad outañ
Demeuz an oñgant prisiuz ;
Mezpiou on sikouro da lamed
Ar mên-bez a zo pounner-braz ?
Ouspenn ez eus lakaet soudarded
War e dro da ziwall ar plas.

Me 'wel penaoz ar mên 'zo ruillet,
Dor ar bez ma edo Jezuz.
Ouspenn em-eus aon 've trañsportet
E gorv gand tud valisiuz :
Ha kement am-eus a nehamant
N'oun petra am-eus da ober,
Pe me 'dle chom amañ 'parlant,
Pe mond da glask 'dro ar harter.

Daou Êl

Petra 'hoarvez deoh, gwreg dezolet ?
Ha den en-deus greet deoh añui ?
Livirit perag oh aflijet,
Ha ni a deuy d'ho soulaji.
Aretit eun nebeudig amañ,
Kontit sujed ho klahar,
Ha ni ho sikouro a-vremañ,
Mar gallom, euz on oll pouvoar.

Madalen

Me 'm-eus sujed d'en em dezoli ;
Kollet em-eus va madou oll,

Ha n'oufe den dodn d'am soulaji,
Na d'am hoñsoli euz va holl,
Nemed rei 'rafet din va Zalver,
An hini¹⁴ 'zo diganen lamet :
Me 'yel partoud dre bep seurt amzer
Ken n'em-bezo eñ rañkontret.

Petar 'zo greet a gorv va Zalver ?
Deut 'oan en esper d'e weled :
Livirit din eta, Jardiner,
Ha c'hwi hoh-eus eñ trañsportet ?
Deut on da lakaad oñgant outañ ;
Mar hoh-eus nep truez ouzin,
Livirit din p'en andred emañ,
M'hen likin e leh m'her havin.

Jezuz

Va mignonez Mari-Madalen,
N'am hlask mui : sede-me amañ ;
En em denn ha pella diouzin,
Ne dleez ket touch ouzin bremañ :
Dit on en em diskouezet 'gentañ,
Evel ma'z on deut euz ar bez :
Ne hallan ket dond da rezista
Ouz neb am hlask dre garantez.

Kee d'avertisa va zeskibien
Penaos ez on resusitet,
En desped gwardou ar Judevien,
Ar re¹⁵ 'oa lakaet d'am mired,
Ha na chom ket da avertisa
Ar paour-kêz Per oll dezolet :
Evidon-me beza nahet gantañ,
E faot 'zo dezañ pardonet.

Ar Judevien

Antret, Lazar, Martha, Madalen,
Er vag-mañ gand oll dud ho ti,
Evid na sortiot birviken
En buhez, er-mêz anezi¹⁶ ;
Ha c'hwi, Joseph, deuet enni ivez
Asamblez gand ho konsorted,
C'hoant on-eus e kollfeh ho puhez
Hag e veh gand ar mor lonket.

Lazar

Unan ahanom, eme Lazar,

¹⁴ An hini : P'hini, er skrid orin.

¹⁵ Ar re : Pere, er skrid orin.

¹⁶ anezi ; anezañ (euz an ti).

'Zo gand Jezuz resusitet.
Esper am-eus ez aim d'an douar
Heb na vezo nikun beuzet ;
Va hoarezed Martha, Madalen,
Na gollom ket a esperañs ;
Gwechall e soñjeh penaoz biken
'N em weljeh mui en ho prezañs.

Madalen

Setu-ni e Marseill arruet ;
Va breur Lazar, sermon ar Feiz,
Ha me 'ya da glask eur plas sekret
Da bedi Doue noz ha deiz.
En eun dezerz e fell din beva,
Pell diouz pep seurt kompagnunez,
Evid ma hellin liproh gouela
Keit ha ma chomin en buhez.

Pinijenn Mari-Madalen en dezerz

Ar peher

Dezerz leun a bep seurt rigol¹⁷,
Hag a bep seurt tristidigez ;
Cheñchit eta lod lod euz hoh horrol
E-barz e laouenidigez ;
Ne welan nemed pep seurt anken,
Pep seurt poan ha pep seurt tourmant
Preparet evid ar Vadalen,
Ne gredan ket e ve kontant.

Madalen

An dezerz en hini¹⁸ edon
N'en-deveus ket re a grizder ;
Er hontrol e', n'en-deus evidon
Nemed memez re a zousder :
Va harantez e', pa 'n em añgach,
Da chom e-barz en eur grotenn,
Rag ar galon 'zo bet re volach
A dle kared ar binijenn.

An Êl

Me 'zo degaset amañ prezant
A-berz neb a garit ar muia,
Dre ma'z hoh-eus kalz a nehamant,
E defaot eur plas da ouela ;
Me ho kaso da eur plas sekret,

¹⁷ rigol : ? "a zo a-dreuz".

¹⁸ en hini : e pehini, er skrid orin.

Ma viot kement a-gostez,
Ma hellit kemmesk gand ho regret
An daelou euz ar garantez.

Ar peher

Livirit, penitantez charmant,
Petar en-deus hoh oblijet
Da soufr kemend all euz a dourmant
War ho korv, ha war ho spered ?
Rag kement ho kwel hag hoh ene
A zo ganeoh oll estonet,
Ha pa ho remerkont er giz-se,
E soñjont oll ez oh follet.

Madalen

Pe me 'zo vil, pe me 'zo charmant,
'Kement-se n'eo ket hoh afer ;
Mez va halon en em gav kontant,
Pa'z e' gwir e plij d'am Zalver ;
Ha c'hwi ivez, mar doh gwir gristen,
Ha mar de' ho kalon touchet,
Sellit hepken ouz va finijenn,
Ha list a-gostez va hened.

Ar peher

Peleh emañ ho servijerien ?
Ne weln nikun war ho tro ;
Perag e renoñsit d'ar voaienn
A-barz ma'z eo deut ar maro ?
Renoñset hoh-eus da eur palez,
D'ar joa ha d'ar gontañtamant,
E-giz ma vijeh inosantez,
Ha dibourvezet a skiant.

Madalen

Me am-eus renoñset d'ar voaienn
Ha d'an ano deuz a vestrez,
Ha me n'em-eus mui a zervijerien,
N'em-eus na maner, na palez ;
Kemeret a ran euz a-vremañ
An ano a zervijerez,
Ha c'hoaz evuruz en em gavan
Mar em-bez lod gand an êlez.

Ar peher

Ar musk, ar roz hag an oll fleurioù ;
Ar bom asamblez gand an ambr,
Ne zantont ket a welloh c'hweziou
Eged ma santet en ho kambr ;
Ouspenn, pa'z on ganeoh parfumet,

Ha c'hoaz ornet gand tapisou,
Hag er grotenn-mañ n'haller gweled
Nemet kevnid ouz mogeriou.

Madalen

Ne gredan ket e kavfet eur hraou
A zantfe ar c'hweziou mad-se
Ha koulskoude Mestr an oll madou
A choazas eur hraou da wele,
Ha n'en-doa ket a dapisiri,
Nemed hepken, foenn ha kolo,
Hag eun nebeudig lienennou,
Pourvezet gand e vamm d'e holo.

Ar peher

Gwechall ho-pije kompagnunez,
Hag e karfeh beza gwelet,
Hag ho prasa laouenidigez
'Oa gweled dond d'ho tarempred.
Ne gareh ket en em gaptiva
Da chom hoh-unan en ho ti :
Penaos e hellit-hu chom ama',
Pa ne zeu den d'ho frekanti ?

Madalen

Mar em-eus karet kompagnunez,
Bremañ me 'zetest anezo,
Ha va brasa laouenidigez
Eo beza pellet diouto :
Me am-eus kemeret eur pried
A chom ganen bepred ama',
Ha n'oufe den dond d'am darempred
Anez dond d'e zizoblija.

Ar peher

C'hwi a lavar hoh-eus eur pried,
Ha ne bella ket diouzoh ;
Gand kement-se m'en em gav souezet
Rag n'her gwelan ket ganeoh.
Nemed design ho-pe d'am zrompla,
Ha rei din komzou da gredi :
Livirit din p'en andred ema,
Evid doned d'am hontanti.

Madalen

Ar preis am-eus a zo ama'
Hag e leh all asamblez ;
Me ne fell ket din dond d'ho trompla,
Mez lavared ar wirionez.
Va halon en-deveus posedet,

Ha fidel e vezin dezañ,
Na jamez ne vezin eur momed
N'am-bezo soñj euz anezañ.

Ar peher

Diroji a rit d'ho kalite,
Da chagrina kement ho kar :
Ne ranker ket gouela kement-se
Evid mond eur wech d'ar gloar.
Peleh e welit-hu ordrenet
Rei kement demeuz a zaelou
Evid ho pehejou tremenet ?
Ofañsi a rit an Aotrou.

Madalen

Me ne don nemed eru beherez
Hag a zeu d'hoh avertisa,
Mar hoh-eus c'hoant da veza eüruz,
Soñjit d'en em goñvertisa ;
Pazeogwir nemed dre ar soufrañs
Ne hallom pretanti repos,
Eo red dond da ober violañs
Evid antren er Baradoz.

Ar peher

N'e' ket red deoh beza ker preset
Da zoufr eur binijenn haro ;
Re abred hoh-eus hi komañset,
List ma vezo tost d'ar maro,
Kemer a hellit c'hoaz hoh amzer
Ha dond d'en em rejouisa,
En eur momed eh hellom ober
Or silvidigez er bed-ma'.

Madalen

N'hellom jamez beza re breset
Da repari or pehejou.
Liez hini 'zo en em dromplet
O kredi eur seurt rezoniou.
Nep piou bennag a ra er giz-se,
Hag a zifer beteg ar fin,
En em rent dign a goler Doue,
Hag a beb faveur iñdign.

Ar peher

Ne remerker mui war ho pizach
Al liou ker vif ha ker brilliant,
Ne weler mui en ho taoulagad
Nemed eur regret lañgisant ;
Ouspenn ez int kazimant beuzet

Mar o list heb o zoulaji,
En berr amzer e viot souezet
Pa ne zervijint deoh mui.

Madalen

Va frofit 've, nompaz eun domach,
Em-be kollet va oll gweled,
Pa ne velfen biriviken jamez,
N'em-bezo morse a regret.
Nep piou bennag a ra gwall uzach
Euz ar mad en-deus resevet,
En em laka e-barz en añgach
Da ober pinijenn galed.

Ar peher

Na tomm na yen n'en-deveus noazet,
Na greet d'ho kened beb domach ;
Ardeur an heol n'en-deus ket poazet,
Nag ho taouarn nag ho pizach :
Eur parasol hag eun evañtail,
Eur maskl hag eur re vanegou
Ho-pije bepred en apareill,
Evid konservi ho liou.

Madalen

Pa zeu din memor a gement-se,
N'hallan ket mired da ruziañ
Gand mez o weled ar vanite
A galz a dud euz ar bed-mañ ;
Ar Werhez hag he mab, va Zalver,
O tehel a-raog an tirant,
A anduras rigol¹⁹ an amzer ;
Hap kaoued nep soulajamant.

Ar peher

Gwechall e teueh de'n em admira ;
Mar weleh skeud ho pizach,
Ma sellfeh er mezelour brema',
N'en em anazfeh davantach :
Dre ar rigol²⁰ euz ho pinijenn
Hoh-eus hen laket da zeha,
E-giz an deliou euz ar wezenn
Pa zeuont o-unan da goueza.

Madalen

Me n'em-eus ket afer davantach
Da zelled ar mezelour ;
N'e' ket ar hened euz va bizach

¹⁹ rigol : gwall-amzer.

²⁰ rigol : strizder.

A fell d'am Mestr ha d'am Aotrou ;
Va halon en-deveus goulennet
Ha roet em-eus dezañ²¹,
Mez n'her havfe jamez preparet
Nemed soufr a rafe, da gentañ.

Eur mezellour n'em-eus choazet
Va Jezuz staget ouz ar groaz,
An hini²², siwaz ! am-eus ofañset
Dre behejou hag a zo braz ;
Dre ma oan gwechall bet ker volach
Da denna gloar euz va hened,
Mez Doue am miro davanñtach
Na gouezin en eur seurt pehed.

Ar peher

Ar bleo kaer-ze ar re²³ a zougít,
Ne zervijont deoh da netra,
Na ne zegasint deoh nep profit,
Nemed dond a rafeh d'o gwerza ;
Me 'wel ez int dija neglijet,
N'hoh-eus anezo nep soursi,
Ha koulskoude o-deveus plijet
En amzer ma teueh d'o zoagni.

Madalen

Ma bleo am-eus atao koñservet,
Hag a rin e-pad va buhez ;
Mar o-deus servijet d'am pehed
D'am pinijenn e raint ivez ;
Gand eur parfuñ sakr int parfumet,
Hag en-deus eur c'hwez ekselant,
Ne oufen jamez o diouered
Nag evid aour nag evid arhant.

Ar peher

Peleh hoh-eus lakaet ho perlez,
Bizeier, karkan, rubanou ?
Habillet oh e-giz eur baourez,
N'he-defe ket a vadou ;
Rag ne welan bremañ semplamant
Nemed koz dillad war ho tro,
Ha n'hoh-eus ken evid ornament
Nemed bleo ho penn d'ho kolo.

Madalen

Me 'm-eus renoñset d'an oll perlez,

²¹ dezañ : fazi reiz : dezi.

²² An hini : pini, er skrid orin.

²³ ar re : pere, er skrid orin.

D'an bizeier ha rubanou,
Evid beza gwir zervijerez
Da vestr an oll berlezennou,
Nompaz ma ve pehed o dougen,
Mar greer uzach vad anezo ;
Mez siwaz din, Mari-Madelen,
Ofañset am-eus Doue dreizo.

Ar peher

N'hoh-eus ket eur gwele da gousked
Hag a ve diouz ho merit :
Ho korv tener 'zo war ar haled,
Me 'meus aon n'en em abrejtit.
Gwechall e kouskeh war ar hoton,
Ha bremañ eet oh war ar mên :
Ma ne girit cheñch euz a feson,
Eet oh dija prest da dremen²⁴.

Madalen

Me a zo en em digustumet
Diouz gweleou koton ha pluñv,
Hag hemañ a zoñjit 'zo kaled,
A gavan re dous ha re eeun
Evid plijoud d'am muia-karet,
Eo red din dond d'e imita ;
Kousket en-deveus war ar haled,
Ha me 'rey ivez evelta'.

Ar peher

Peleh 'ma an amzer dremenet,
M'ho-pije a bep seurt bouedou ?
Ha bremañ n'o gweler servijet
Nemed a vara ha louzou :
Ha n'hoh-eus evidoh oll breuvach
Nemed hepken dour da eva,
E-leh m'ho-pije 'vidoh uzach
Demeuz al likeuriou gwella.

Madalen

Va Zalver en-deveus bet yunet
Abalamour d'or pehejou,
Ha ni en em gav iñportunet
Oh imita e egzemplou.
Eur horv 'zo maget dre licheri²⁵
Ne zent jamez ouz ar rezon,
Hag ez eo red dond d'en em dompti
Dre ar yun hag an orezon.

²⁴ da dremen : da vervel.

²⁵ licheri : marlonk.

Ar peher

En divertisamantchou publik,
Er bal, en dañs, en opera,
O vond da gleved kana 'r muzik,
E teueh d'en em zivertisa ;
Euz ho pemp skiant naturel
Ho-pije pep seurt plijadur,
Hag ez oh deut bremañ ker kruel,
N'akordit netra d'an natur.

Madalen

An divertisamantchou publik
A zeue da noazoud d'am ene,
Rag euz a chast e teuont lubrik,
Peb den 'zo daonet dre 'n hent-se.
Komedi, bal, dañs hag an teatr
A zeu da cheñch spered an den,
Hag a rent ivez memez idolatr,
Siwaz ! kalz a grouadurien.

Ar peher

N'ho klever ket o kana soniou
Evdi en em zivertisa,
Ha ne zorti mui ezu ho kenou
Nemed komzou ar santella ;
Ouspenn, lezet hoh-eus an dañsou,
E-leh m'ho-poa plijadurez,
Evid galloud rei huanadou
En eur plas a dristidigez.

Madalen

Va zeod mar en-deus va zervijet
Evid meuli an êrouant,
Me 'viro en amzer da zoned
Na vezo sur ken iñsolant.
Ar bal, an dañs hag an nozveziou,
Va Doue, c'hwi a oar en oll
Ma ne rafen pinijenn anezo,
A rafe din moned da goll.

Ar perher koñverstiset

Godue kement am-eus lavaret,
O soñjal ho pervertisa,
Me 'wel ez on ganeoh gounezet,
Va halon n'hell mui rezista ;
Kontregn on da cheñch euz a gomzou
Ha da garoud ar binijenn ;
Me 'ziskouezo dre va oberiou
Penaos ez on cheñchet a-grenn.

Ha kavet e ve eur femelenn
A ger rezolusion,
E-giz ma'z eo Mari-Madalen ?
C'hwi 'zo penitantez wirion.
Grasou braz hoh-eus digand Jezuz,
Resevet hoh-eus ar voaienn
Da renta ar bed, ar hig, koñfuz,
Satan hag e zervijerien.

Me am-eus kemeret kalz a boan
Ha n'em-eus netra gounezet,
Da zervija piou ? nemed Satan ?
Eur vez eo din hel lavared :
Ha me a oa deputet gantañ
Da zond d'ho tenti, Madalen,
Ha c'hwi 'zo bet treh din ha dezañ
Ar pez na gredjen birviken.

Martha

Na zervijit mui biken
Eur mestr hag a zo eun tirant ;
Seul-vui e servijit e lezenn,
Seul-vui e rey deoh a dourmant ;
Kemerit Jezuz da gabiten,
Hag en em añrollit gantañ,
Ha mar don-me Mari-Madalen,
En em gontantit anezañ.

Bet embannet gand A. Ledan, e Montroulez, er bloaz... (fin an XIX^{ved} kantved, pe penn kenta an XX^{ved}).